

(f° 83)

## Ar goadigenou.

DiTostait aman dam sillaou  
 Me disko dec'h en ber komzou  
 eun torfet arriet  
 Ebars en drev Sant Evinek  
 Gant merc'hedigou Ker ar moen  
 ar re se eo ar pen.

Ken evit kommanç d'he c'hanan  
 exkus ganec'h a c'houlennan  
 es pèsial ous ar merc'het  
 Pere zo presant deus va c'hlevet  
 A se zo kustum da neun mezi  
 m'ho ped dam exkusi.

lun devez e savchont bure mad  
 Da kas ar lez da Wern-ar-Prad,  
 Evid ober goadigeno  
 evel ma he ar c'his er vro.

(f° 84)

En quern-ar-Prat pa errujont  
 Dibonjour a joa a leverjont  
 2 a setu aman toul al lez  
 Petek ar vintimvez  
 1 Deboujour a joa en ti man  
 Katel gonan pebech he man.

Katel gonan a lavare  
 Na Da Job an tallek enom neuze  
 Job an tallek mar g'ententet  
 It-tu da rei chis[t] d'ar merc'het.  
 Id da rei chist dar merc'het  
 Me kred ho deus sere'het.

64

Mag er c'hoas pa entrejont  
 No pe zek bouteillad a effchont  
 C'hoas e larent pa woan[te] deud day ti  
 Ne vom den evit ho c'hontenti.  
 Ma Ma krijont var boës ho fen  
 tena chist d'ar veren.

Katel Gonan a lavare  
 De mab ian an tallek neuse:  
 Ian an tallek mar c'hententet  
 It-tu da ambrouk ar merc'het  
 It-tu da ambrouk ar merc'het  
 Gant aon na ~~veant~~ (1) burzet.

(f° 85)

Mari Job ar Meur a rede  
 Diou torken e fod deus an eure  
 C'hoas e lavare d'he c'hoare  
 Setu torret va fod gan-he  
 Ma zgo ar chist zo kos da se  
 O dond da eva re.

ian an tallek a lavare  
 De vom er ger pa arrue  
 Otrou Doue beb-eus pitie'  
 Birviken James plac'h nam he  
 Birviken James plac'h nam he  
 erid ar poan zo gante.

Mari Job ar meur a lavare  
 Divar he ilin en he goële  
 Otrou kure kit en o dro  
 Pe ma savan me ho kasso.  
 Ma savan me er mes deus va goële  
 M'ho kasso al lesse.

(f° 86)

An tro noz vintin e mam gant he quialen  
 A ia da gaout he berjelen.  
 Berjeren savet er mes  
 Mar deot da kass ar les.

(1). - D'abord veant; un e est écrit en surcharge sur ce.

Ma mamik paour ma eskuset  
~~evit~~<sup>namet</sup> eur wec'h edeon (1) manket  
 mar dan me bikes (2) da kass les  
 me lakeio gwal eves.  
 es picial da Wern ar Prad  
 me lakeio evez mad.

hini en deus c'hoant da ziiski r' Son  
 Applikit kentan var an ton  
 Rag an ton a zo diffieil  
 D'an hini n' voar ket ar stil  
 Me a zo goas a speret  
 A meus-hi Komposet.

Jannet Kquiduff 24 X<sup>bre</sup> - 50.

---

(1). - edeon, que je lis, est écrit en surcharge sur un autre mot que je ne puis déchiffrer.

(2). - Le ms. a : bikes ; lire : biken.